



19

CANTIC SPIRITUEL

*En enor an Itron VARIA AR KER-
GOAT e Parres Quemeneven , tost
da Guemper , tost da Locronan.*

Var ton Guers Santes Genoveva , e
gallec : *Adorons du Tout-Puissant la di-
vine Providence.*

MARTI guir vam da Zoue ,
Rouanez meurbet galloudus ,
Var an douar hac en eê
Delicou ho map quer JESUS ,
Ato nin hoc'h anave
Evit hor mam carantezus :
Deoc'h e c'hoffromp hor peden ,
Hac ho pedomp d'hor souten.
Er bed-màn leun a viser ,
A boaniou hac eus a labour ;
Petra dleomp - ni d'ober
Nemet implori ho sicour ?
Deomp - ta , deomp hep coll amser
Bezomp ato dezi recour ;
Pobl a Guemeneven ,
Goulen a ra ho peden.

Deja e meur a feçon
 E deus roet doc'h merquou parfet
 Demeus e attantion
 Da vœuou an dud affliget ;
 Dre e intercession
 O deus recevet o requet ,
 Ar re bouzar ar c'hlêvet ,
 Hac ar re dall ar guelelet.

Tud a bell amser privet
 Eus an usach eus o memprou ,
 Goude o vœuou rentet ,
 So dilivret eus o foaniou ;
 Pidot-hit'a gant respet ,
 Presantit dei ho miseriou ,
 Hac e santot hep dale
 E c'hredit dirac Doue.

Guelelet a reomp o tont
 Tud a bell bro a vandennou
 D'ar Kergoat , hac e lesont
 Ofrançou hac oferennou :
 Gant joa bras e lavaront
 O deveus bet o goulennou.
 Pebes tensor, pobl christen' ,
 E parres Quemeneven !

Eus a guerne , a Leon ,
 A Dreguer hac eus a Venet ,
 Gant ur guir devotion
 Er Kergoat cals tud a gaffet
 Aroc ar Brocession ,
 En o dourn goulou alumet
 Miraclou sclær hac anat
 Eus ar Verc'hes er Kergoat.

Goazet ; merchet ha Groague ;
 Prest da vervel o tivoada ,
 A so pront rentet pare ,
 Goestlet d'an itron V A R I A
 Ar Kergoat ; re - all ive
 Da un tan - goall an estrancha
 Exposit , M A R I buan
 A deu da laza an tan.

Pet d'ar maro exposit
 E creis ar mor , e creis an dour ,
 Er Kergoat o deus cavent
 Un dorn favorabl d'o sicour :
 Presant e vezo bepret
 D'ar pinvidic ha d'ar paour
 Er pedo a galon vat
 En ilis eus ar Kergoat.

Ne ouffe biquen lagat
 Enoi o consideri
 An ilis eus ar Kergoat
 Consacret d'ar verc'hes V A R I .
 Tud a ro a galon vat
 Ofrançou evit e orni ;
 Ne ouffet biquen guelet
 Un ilis caëroc'h savet.

Dre ar sent ha santeset ,
 C'hui ra , ma Doue , cals burzudou ;
 Petra na reot - hu quiet
 Dre ho mam feuntun a c'hraçou ?
 An oll sent ha santeset
 Da V A R I , mam a viraclou ,
 A rent enor ha gloar
 En eê ha var an douar.

4

Da sul ar C'hasimodo
Piou a ouffe niverri
An nombr bras a dud a so
O veuli ar verc'hes VARI
Er Kergoat, hac a so
Dez bisitation MARI,
En tri sul quenta a vis east;
Hag eus a bell hag a dost.

Da vouel an Assomption
Ez eus induljançou plenier,
A bep pec'het guir pardon
En ur goëssion sincer
Gant ur guir gontrition.
O ma JESUS, ô ma Salver,
O MARI, mam douç ha mat,
Nin ho quello er Kergoat.

Cris e ve sur ar galon
Na dui da squilla daëlou,
O velet tud er pardon
Dilivret a gals a boaniou;
Humbl int en o oræson,
En o action a c'hraçou:
MARI a gleo o feden;
Hac hi o deus o goulenn.

Merc'h pur d'an tad eternal;
Mam da JESUS-CHRIST hor Salver,
Pried d'ar speret-santel!
Goude privilajou quer caër,
Bezomp oll dezi fidel,
Pa e deus quement a bouer;
Ma vezimp eürus goudese
Epad an eternite. **A M E N.**